

oremañ



17 breton en toull-bac'h

Frituriou : Enkadenn er Vro Vigoudenn

Dlennadegoù e Norzhkatalonia. E-barzh Bremañ miz Ebrel e oa ur pennadig o komz eus listenn rannvroelouerien "Unitat Catalana", evel pa ne vije bet nemeti o klask ar mouezhioù "catalanistas" evel ma larer er vro.

Kenvroiz ker ! Un evezhiadenn hepken diwar-benn kartenn kumuniezh Europa embannet war-bajenn 8 ho niv. diwezhañ (niv. 128 miz Mae 1992) : ankounachet eo bet reter Alamagn, d.l.e. ar pezh a oa gwechall "Republik Demokratel Alamagn" (na oa ket demokratel, tamm ebet, evel ma oar an holl !); staget eo bet ar vro-se d'ar peurrest eus Alamagn e 1990. Un nebeut slavegourien a zo o veyañ du-se : pobl ar Sorabed, nepell diouzh harzoù Bohemia ha Polonia ; n'int ket gwall anavezet dre amañ ; ur pennad a oa bet embannet diwar o fenn kouskoude war niv. 68 "Carn" (winter 1989-90) d'ur mare ma oa c'hoazh eus an R.D.A. ; e gouezeleg avat e oa ar pennad-se, gant un diverañ e saozneg.

Gant va gwellañ sonjoù.

B. Kadored (Pariz)

Hunvre Lenn a ran war "Le Monde (24-25/05/92) e korf pennad François Grosrichard : "Kouerien o letoniñ" ar genoù-mañ... Priz an edeier o vont war izelel, e vo tec'hel al labourerien-douar da dalc'hoù dekaet anezho dre vouetañ o saout pe o yer gant ed. Darbet eo e c'hoazh d'ar saverezh saout pe yer bezañ treuz-kaset eus toledoù-geot ar C'hornog pe ar Venezig-Kreiz da blaenennoù bras ar Stêrdachenn barizian, pulh endeo... Perak ne vefe ket gouest kouerien Breizh pe re ar Venezig-Kreiz da brenañ o ed aet marc'hadmatoc'h, gant kouerien ar Stêrdachenn barizian evit vouetañ o saout pe o yer ? Evit mad an holl evel-just. Pe un diskoulm bennak all... da jinañ.

J. Boucherit (Roazhon)

TAOLENN

BREMAÑ niv. 129
miz Even 1992

Lizhiri	2
Bretoned en toull	3
Yezh ar republik	4
Brezhoneg en D.S.	5
Enkadenn er Vro Vigoudenn ..	6
Goulnnadeg SAB	7
Dizarmañ	8-9
Slovakia	10-11
An Inizi Malou	12
Preder	13
Breizh/Kroatia	14
Kendalc'h Keltiek	14
Keleier	15
Levrioù nevez	16
Dudi	17-18-19
Faltazi	20

Maketenn gant Lena Louarn ha J.M. Roynard.

Skoazell gant Kristell Louarn ha Nadine Quetier.

Difaziñ gant Joel Donnart, Yann Varch Thorel, Olier ar Mogn, Paskal Tabuteau, Herve Kerrain.

Pennadoù gant Jil Killevere, Olier ar Mogn, M.K., AVC, Jean Yves Broudic, TL, SAB, YB Kelvenneg, Reun an Hir, Paol ar Meur, Tepot Gwilhmot, Y. Manegwenn, Joel Donnart, Yann Talbot, Lena Louarn, Hegareg.

Luch'skoudennoù gant JM Roynard, O.F., N.O.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn
SKOAZELLER : Olier ar Mogn
Skrivet e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, gant skeudenoù, dreist holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok an 30 a viz Even, evit niverenn doubl an Hafv. ☎ 99 38 75 83 faks 99 63 82 28

Ar pennadoù ne engoustiomp nemet ar re a sin anezho.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 Roazhon, BREIZH.
CPPAP 62374

BRETONED EN TOULL

Philippe Canevet 211 027 C
D3 Maison d'arrêt 7, avenue des Peupliers Fleury Mèrogis 91705 Ste Geneviève des Bois.

Reun Tampereau 266 93Q
D5E Maison d'Arrêt Quartier des femmes 9, avenue des Peupliers Fleury Mèrogis 91705 Ste Geneviève des Bois.

Henry Paul Bernard 211 036 N D4 Maison d'Arrêt 7, avenue des Peupliers Fleury Mèrogis 91705 Ste Geneviève des Bois.

Patricia Civel 21999 F7 EST
213 Quartier des femmes Maison d'Arrêt du Val D'oise 213, rue Enneury 95520 Osny.

Véronique Thomas-Hunault 3319 Cellule 22 Maison d'Arrêt de Versailles 28, avenue de Paris 78000 Versailles.

Emmanuelle Gauchet 3320 cellule 22 Maison d'Arrêt de Versailles 18, avenue de Paris 78000 Versailles.

Gilles Le Jeune 249 530
D104 Prison de Santé 42 rue de la Santé 75014 Paris.

Bénédicte Le Brumant 825 747 B Maison d'Arrêt des femmes Allée des Thuyas 94261 Fresnes.

Josiane Segalen 825 748 C
Maison d'Arrêt des femmes Allée des Thuyas 94261 Fresnes.

Annie Alexandre 825 746 A
Maison d'Arrêt des femmes Allée des Thuyas 94261 Fresnes

Joël Kerne Prison de la Santé 42, rue de la Santé 75014 Paris.

Deuet er maez :
Malou Canevet (22/05)
Anne-Gwenn Bernard (27/05)
Odile Tadier (27/05)
Anne Hewit (27/05)
Jakez Perros (27/05)
Dominique LeBrumant (27/05)

17 breton en toull

Taol sponterezh a-berzh Stad



2600 den deuet eus a-bep korn a Vreizh d'ar Sadorn 23 e Kemper

Skoazell d'an doullbac'hidi Ur vodadeg-kelaouiñ e Brest

« Digorit ho tor hag e voc'h lakaet da dorfedour » : evel-mañ e lakae ar gudenn an alvokad Chouq da geñver ur vodadeg-kelaouiñ a oa bet e Brest d'an 18 a viz Mae.

Un daou-ugent bennak a dud, en o zouez meur a hini hag a oa bet harzet ha lezet da vont da c'houde, a oa deuet da gontañ ha da zisplegañ penaos e oa bet harzet an dud ha dalc'het gant ar bolis goude-se.

A-du e oant holl evit lavaret e oa bet implijet doareoù feuls ha dismegeñsus gant ar boliserien. Staget e oa bet tud ouzh un dommerez gant grizilhonoù, dirak o bugale. Pa vo bet lavaret e oa bet lakaet ivez bep a bistolenn ouzh

ividig an tad hag ar vamm e vo komprenet e oa brav d'ar boliserien goulnnata ar vugale spontet-mik. A bep seurt traoù heugus all zo c'hoarvezet hag a laka da soñjal e doareoù Stadoù n'emaint ket war roll ar broadoù demokratel ...

Un taol sponterezh a-berzh Stad o vo bet an harzadegoù-mañ. Distret-kemañ e oa ar pezh a c'halled "tamall" d'an dud bet goulnnetaet. N'eus bet kavet netra e ti an dud harzet a c'helle lakaat da grediñ o defe kenlabouret gant ur stourm armet bennak. Lezet e vo an doullbac'hidi da zistreiñ da Vreizh buan a-walc'h emic'hañs.



A-gleiz da zehou : A. Hunault, K. Ar Bras, A. Civel, Y. Chouq

Gwiriou mab-den

Pik goulnnata

Meur a c'houlenñ a chom hiziv hep respont goude ma vije bet harzet ouzhpenn 50 a dud e Breizh abaoe penñ kentañ miz Mae. Tamallet ouzhpenn 30 deus ha 17 anezho zo bet toullbac'het. Ha perak kemer-se ? evit bezañ roet bod da Euskartz, distad abaoe 1986, pa ne vefe ket nevezet ken o c'harfennoù a respudi politikel ha pa ranke ar re-mañ neuz mont abaoe a di da di da gask lojiz. Petra c'hoarvez 'z e stad c'hall, parodoz an demokratelc'h ?

Da gontañ e ranker lavaret ne 'z eus ket bet biskoazh anv eus an dud tamallet hiziv da reñt bod da dud ETA. Ma 'z int bet pe ma 'z int c'hoazh e-barzh ETA, ne oa ket bet roet da c'houzourien d'ar re o doa roet bod dezho hag ouzhpenn-se ne oa ket skrivet war o ft. Da eil, an SRPJ e unan n'en deus ket prouet betek hen e oa tud eus ETA ar re a oa bet roet bod dezho.

Bremañ avat n'eo ket ar wech kentañ e kustum lod gwelet tan e-lec'h ma eus nemet moged avat. En em c'houlenñ a ranker avat perak. Perak tud tost eus al labour douar big hag eus an emsav brezhoneger hepken (e-pad ezheite e vije bet gwarzet tud Diwan...). Perak bremañ dres'hoal ha pas d'ar vizio pa oa an Euskartz size ? An SRPJ pe an RG a oa evit ur gomision d'an SRPJ evit ober war dro parodoz ETA e stad c'hall a-bezh. Ar gomision-se a oa bet nevezet d'an 2 a viz Mae. E kreiz miz Meurzh e ouie mat SRPJ pelec'h kavout Euskartz, e Brest d'an nebeutañ. N'oa ket deuet da gontañ anezho pa ouie e pelec'h edont. Perak neuz d'ont miz hanter war-lec'h da skeiñ bretoned en toull pa oa bet lakaet "sponterien" da skarzhañ kuit.

Achaeze da soñjal n'eo ket hepken Seville, Barcelona hag an TGV da werzhañ da Gonzalez a zo e kont, ez eus ur c'hanned d'ober ha n'eo ket ret bezañ paket gant ar paranoia evit hen ober : Piv en deus interest hiziv da ziskouez eus an emsav brezhoneger evel ur bodad torfedourien ? Piv ma n'eo ket ar PS, p'emañ all o lakaat da dremen lezenn ar galleg, yezh nemet ar republik, dirak Brojeù Bro-C'hall.

Kizul departamant Penn ar Bed -a-drugerezh da Jean Yves Cozan- en deus komprenet mat tre e-pelec'h emañ an dalc'h pa c'houlenñ ma vo diebet kenkent an holl Vretoned a zo en toull ha ne vije ket "mesket an dud-se hag an abadennoù sevenadurel brezhnek".

Komprenet en deus kement all J.P. Jeudy, maer Karaez, p'ev deus c'hoazh e gomun un euskart a zo klask war e lec'h e stad spagn goude ma vefe bet nac'het gant lezenn Poliers kas anezhañ d'el dro. Ar c'het ar stad c'hall a vez roet dezhañ zoken p'ev deus an APL evit sikour p'emañ leurm d'i.

Ouzh piv vez graet goap neuz ? Eus an Itron Le Vert e Paris ? Kredapl bras eus ouzhpenn sur ! Bremañ avat, an emsav a c'hell ivez tannañ e vad eus ar pezh a zeuz da wezhañ ur brezina politikel, pa vez savet kuzulioù skoazell d'ar Vreizh a-bezh ha pa 'z eo boazet ha prest bremañ an dud da savet o mouez en dro. Ur stourm hollak a zo loc'het aze. Hervez ar CIA, bro Euskadi ha bro Katalonia a vo "dizalc'h" a-benn 10 vloaz. Perak ket ? Met m'ema hi a-dreñv da ETA pesaert prize a paao Euskadi hag an Euskartz ; prize bro Slovenia ha bro Kroatia ? Amañ e Breizh hon eus ivez ur ger da lavaret war ar pezh a zo o tont amañ koulz hag an Euskadi ■

Jil Killevere

Yezh kelenn Diwan en arvar

Galleg yezh ofisiel ar republik

Hervez he Bonreizh, ne oa ket a yezh ofisiel er Stad C'Hall. Ne zlefe ket padout pell ken an diouer-se.

Deskiñ a raed, e-barzh "Le Monde" ar Gwener 8 a viz Mae, e oa un toullad kefreduerien c'hall o studiañ penaos lakaat dr gouarnamant da sevel ur politikerezh yezh diabarzh, ouzhpenn an hini diavaez a gaser war-raok endeo (gant ar "francophonie"). Meneget e oa anvioù Jack Ralite, bet ministr komoun e 1981, Regis Debray, bet kuzulier Prezidant ar Republik, ha Michel Guillou, rektor.



Va yezh kelenn a zo hag a vo Brezhoneg

Mennad kinniget

Kinniget o deus ar re-se d'un nebeud politikourion. Chevenement en o zouez, lakaat ar Gambur da votiñ ar mennad-kemm-mañ d'ar Vonreizh : "Ar galleg eo yezh ar stad ha strollennoù tiaried ar Republik ; yezh an deskadurezh hag al labour eo ivez".

Ma vefe votet ar c'hinnig-se ne c'hallfe ket ar brezhoneg ken bezañ yezh ofisiel e Breizh (e framm ar stad C'hall) na bezañ yezh kelenn Diwan. Gouez da wiraoirion zo e vefe kinnig-lezenn Dollo a-zivout "yezhoù rannvroel Frans" a-enep ar Vonreizh neuze.

D'ar Yaou 30 a viz Ebrel bepred, e kinnige ar c'hannad parizian RPR Jacques Toubon ur mennad-kemm d'ar Vonreizh a-zivout "ar galleg yezh ar Republik".

Mennad Votet

Ha d'ar Merc'her 13 a viz Mae e voe kaoz eus ar mennad-se er Gambur. Hervez a lenned e-barzh "Le Monde" ar Yaou 14 e oa ne'chet un toullad kannaded, ar Breizhad Yves Dollo (PS) hag ar Barizianez Muguette Jacquaint (PCF), an Elzasad Adrien Zeller hag ar Rouergad Brianne (UDF), en abeg d'ar skolioù a vije lakel d'ar yezhoù "rannvroel".

Respont a reas Michel Vauzelle, ministr ar Justis, e oa ar yezhoù-se "unan eus pinvidigezhioù hon glad broadel" ha ne vije ket "nozhet ouz ar doujañs ar sevenadur rannvroel". Hag an holl a votas ar mennad kinniget.


Strollennoù triadel "collectivités territoriales" e Gambur da zegemer an Emglev etrevroadel a-zivout Gwinoù ar Vugale, gant ur mennad enebet d'ar meliad 30 a anavezze gwirioù yezhel bugale ar bihannverou kenel.

M.K.

Brezhoneg en deskadurezh-stad

Sinadur un emglev en Il-ha-Gwilun

War-lerc'h ur bloavezhad emvodoù ez eus bet sinet un emglev etre Ensellerezh Akademiezh, sindikadoù, kerent ha kelennerien d'ar 26 a viz Mae. Talvezout a raio evit tri bloaz ha degas e tefe gwellaennoù evit deskiñ brezhoneg azalek ar skol-vamm betek ar vachelouriezh.



Enseller akademiezh Il ha Gwilun, an Ao. Migayrou, gant e skoazeller, e-pad emgav ar 26

Ar wech kentañ an hini e vefe pleustrat war ur seurt raktres war dachann ar brezhoneg er skolioù-stad, a gav deomp. Sinet eo an emglev gant

- an Enseller Akademiezh evit an Departamant, an Ao MIGAYROU ;
- an Enseller war ar brezhoneg, an Ao. EVENOU ;
- ar sindikadoù SGEN-CFDT ha SNUDI FO (n'achet eo bet gant ar FEN) ;
- ar gevredigezh kerent APEEB/KTKB ;
- ar gelennerien vrezhoneg.

Disklenn a ra an emglev-se ar pal-mañ : astenn kelennadurezh ar yezh. Lakaet eo bet sklaer e peseurt skol e vo lec'hiet ar c'hentelioù, pat bugel a vo ret a-benn digeriñ ur c'hlas pe ur gentel.

E-keñver ar bruderezh d'ar skolidi ha d'o familhoù, eo bet skrivet e vo graet bep bloaz gant an E.A. er skolioù (ha zoken er Morbihan hag el Liger-Atlantel e bro-

Reudon), hag e c'halle bezañ skignet paperioù gant an APEEB ha gant ar gelennerien o-unan ivez. E pep live eo bet resisaet an traoù e div hentenn : divyezhek ha diret.

Er skolioù-mamm ha kentañ derez

Digoret e vo ur skol-vamm divyezhek e Roazhon e 1993 ha krouet ur post evit-se gant an Deskadurezh-Stad. Abaoe meur a vloavezh e vaze goulnennet ar skol-se gant ar gerent : war-dro 30 bugel a zo bet kontat gant an APEEB e-kerz ar bloaz e skolioù kreiz-kêr, hag un 20 bennak all gant an E.S. ha n'int ket ar memes re !

Panaveit ur gudenn a blas en ur skol e vefe bet digoret e miz Gwengolo 1992 : - kendalet e vo gant ar c'hentelioù diret e tair skol kreiz-kêr gant strolladoù 10 bugel ;

- kroget 'vo gant ar c'hentelioù diret e skolioù kentañ derez Colomber ha Louise Michel, gant strolladoù 15 skolid ;
- e 1994 e vo graet un enklask gant an E. A. diwar-benn an ezhommoù kentelioù diret e bro-Reudon ha Sant Malou.

Er skolojaoù

- Kendalet e vo gant an hentenn divyezhek e skolaj E. Zola eus ar 6vet klas betek an trede : 3 eurvezh vrezhoneg ha 3,5 a zanvazioù e brezhoneg ;
- brezhoneg LV2 a vo kinniget e daou skolaj e Roazhon, unan e Sant Malou hag unan all e Reudon ;
- brezhoneg diret (2 eurvezh bep sizhun) a vo kinniget er skolioù-se azalek ar 6vet klas, gant ma vo goulnennet gant Kuzulioù-Ren ar skolioù.

An niver bihanañ ret evit ar c'hentelioù-se a vo 5 bugel en hentenn divyezhek ha 6 a-hend-all.

Ne vo ket brezhoneg e pep skolaj Roazhon, met en ur ginnig kelenn ar yezh an allasañ posupl azalek ar 6vet klas, e vo klasket sevel un hentenn gant muioc'h a skolidi.

El liseoù

- Kinniget 'vo brezhoneg evel LV2 bis d'ar skolidi an hentenn divyezhek e 1992 ;
- kroget 'vo gant an hentenn divyezhek azalek 1994 en ur ginnig 3 eurvezh war ar yezh evel LV2 bis ha 3 eurvezh evit kelenn un danvez all e brezhoneg pe 2 eurvezh stumm strolladoù pleustrek ;
- brezhoneg LV2 hag LV3 a vo kinniget e Brequigny ha Zola e Roazhon, J. Cartier e Sant Malou, ha Beaumont e Reudon en eilvet klas e 1992, er c'hentañ derez e 1993, er c'hlas diwezhañ e 1994 ; dalc'het e vo d'ar sistem kozh (div eurvezh kentelioù diret) e tri lise all e Roazhon hag e vo savet kentelioù e strolladoù pleustrek e liseoù all hervez ar goulnenn.

Evit pep kantel e vo ret bodañ 6 bugel. Pal ar frammadur-se a zo astenn tachann ar yezh e skolioù 'zo, gant muioc'h a skolidi ivez.

N'eus ket kaoz eus stummadur ar gelennerien en IUFM an emglev sinet, nag eus plas ar brezhoneg pe an danvezioù e brezhoneg en arnodennoù (BEPC ha bac), ar pezh n'emañ ket dindan renerzh un Enseller Akademiezh.

N'eo ket komzoù toull nemetken an emglev-se mamestra, rak ret e vo d'an E. A. astenn an eurvezhoù kelenn : dindan tri bloaz e tefe bezañ daougamantet pe dost er skolioù-mamm-kentañ derez hag er skolojaoù.

Hag gant ma vo dalc'het d'a c'her gant pep hini, graet bruderezh mat ha savet kentelioù dudius e tefe bezañ gwelet ur c'hresk war niver ar skolidi ivez. ■


Jean-Yves Broudic

Friturioù

Enkadenn er Vro Vigoudenn

Fall ar stal er vro Vigoudenn. Div fritur an eil war-lerc'h eben a zo o paouez lakaat o melestradurezh etre daouarn al lez-varn kenwerzh : ar stal "Gravier-Ainé", 140 implijad eus Plouhineg, hag ar stal Paul Chacun, 180 implijad eus ar Gelveneg. An embregerezh fardañ ar-bebeur ar Gav-Guillou eus Plozeved, 146 micherour ennañ, ne ya ket gwall vat kennebeut e stal goude bezañ kollet ur marc'had a-bouez gant ur chadenn genwerzhel vras. Gant kudennoù ar peskerezh ouzhpenn-se e c'heller bezañ nec'het evit dazont ar Vro Vigoudenn.

Petra chomo er Vro Vigoudenn ? Sed ar goullenn a c'heller ober hiziv. Da gentañ, ne ya ket koulz ar peskerezh hag un nebeud bloavezhioù zo. E 1991 eo 11% nebeutoc'h a besked a zo bet degaset e porzhioù ar vro-Vigoudenn ha 3% nebeutoc'h a dalvoudegezh e-keñver ar bloavezh 90. Digrask kementad ar pesked er mor eo a zo kaoz da gentañ. Hag evit chom hep kas da hesk an elenenn eo bet savet politikerezh ar c'holioù gant Bruxelles ha diazezet ar steuñv Mellik a Bro-C'hall evit digrask niver ar bigi pesketa. E Penn-ar-Bed eo 200 bag a zo bet lamet kuit diwar ar mor, da lavarout eo 17.000 kilowatt diwar war-dro 300.000 kw en holl (1,057 milion kw e Frañs). Di-hell ar peskerezh eo ar chanterioù sevel pe repariñ bigi, fardañ rouedoù en em gav gant daisterioù. Abaoe bloaz eo bet ret da chanterioù evel Glehen er Gelveneg hag e Pont'n Abad dic'hoprañ un 10 bennak a implijidi. Memestra evit an embregerezh fardañ rouedoù An Drezen er Gelveneg, hep kontañ ar brenerien besked pe c'hoazh an dezougerien.



A.C.F. e Plouhineg. En nevez amzer 1991 eo bet serrat stal Banaleg ha setu bremañ tro an div uzin all. 138 micherour Plouhineg a zo bet lakaet war roll an dud dilabour hag en em c'houlenn a reer peseurt diskoulm a vo evit 180 implijad Paul Chacun p'emañ an embregerezh bremañ e dalc'h al lez-varn a genwerzh. Daoust ma 'z eus embregerien war ar renk evel Intermarc'h pe "pêcheurs de France" eus Penmarc'h evit adkemer al labouradeg ne vo ket savetevit an holl implijidi.

Kevezerezh Maroko ha Taïland
Met ar gudenn ziaez a zo bet lakaet anat gant Mark Andro, rener "Info Bretagne Service" en ur studiadenn a zo bet savet gantañ evit Kuzul Iechel ar pesketa : 2482 implijad a zo er friturioù e Breizh ha 16 embregerezh (diwar 3480 implijad ha 23 embregerezh er Frañs). Produñ a ra

Breizh 95% eus boued-mir ton ar Frañs, 90% ar brili hag 60% ar sardin. Kontañ a reer, a-hend-all, war-dro 2500 dan o labour war-dro ar fardañ bouestoù ha pakerezh e Bro-Gerne. Met hiziv an deiz eo lakaet an holl implijidi-se en arvar gant kevezerezh bro Maroko ha dreist-holl an Taïland : ar vro-mañ ha deus produet hag e-zporzhiet 225.000 tonenn ton e 1990 tra ma n'he doa graet nemet 4.000 tonenn e 1979. 17.000 tonenn a sardin a zo bet gwerzhet er c'henvarc'had gant Maroko en 1990. Gwall zo eo an amzer da zont ma ne glasker ket diskoulmañ kudennoù friturioù ar Vro-Vigoudenn. Met, meur a hini a soñj e vo ret cheñch penn d'ar vazh ha emdreiñ war-du oberiantizoù nevez-penn-gantañ evit Kuzul Iechel ar pesketa : 2482 implijad a zo er friturioù e Breizh ha 16 embregerezh (diwar 3480 implijad ha 23 embregerezh er Frañs). Produñ a ra

Saveteiñ darn eus an Implijidi
War ar marc'had emañ ar friturioù o serrañ an eil war-lerc'h eben hep ma vefe dre ret un darampred gant stad ar peskerezh. Kevezerezh bro Maroko pe gevred Azia a zo e kont e gwirionez, rak gant pesked prenet e-maez bro eo e vez graet boued-mir evit an darn vrasañ. En em c'houlenn a reer c'hoazh, er vro-Vigoudenn, penaos ez eus bet tu da lezel ar c'hengevredad EXAL da bremañ friturioù ar vro d'o chas d'an trañ. Un embregerezh vitan eus kreiz Bro-C'hall, ez eo EXAL. Prenet gantañ da gentañ ar fritur boued mui Gravier-Ainé e Landurval (La Turballe) e bro Naoned ha serrat da vat nebeut amzer war-lerc'h. Ar P.D.G. an Actrou Beauligat en deus adreñet neuze an embregerezhioù Paul Chacun (Ar Gelveneg ha Banaleg) hag

Rentañ-kont goulnadeg Stourm Ar Brezhoneg ouzh pennoù al listennoù o'n em ginnig da geñver dilennadegoù rannbarzh miz Meurzh 1992

Kaset e oa bet pep a c'houlennadenn da bennoù an holl listennoù war ar renk e pemp departamant Breizh war-bouez reoù ar Front National dre ziviz, hag un toulladig listennoù all pa n'eus ket bet kavet ur chomlec'h da gas an leuliad dezho (lutte ouvrière 22 ha 44, Génération Ecologie 22...)
Meur a hini a zo ha n'o deus ket teurvezet respont. En o zouez e rankomp menegiñ al listennoù kaset gant ar "Parti Socialiste Français", a ziskouez ez eus kenemglev etrezo da vont hebiou da gudenn ar Brezhoneg.
A-hend all hon eus bet respontoù a-berzh listennoù er pemp departamant hag a-berzh an holl gostezennoù politikel.
Trugarez a lavaromp eta d'an holl o deus respontet deomp.



Gant ar goullenn ma vo roet d'ar brezhoneg un dezvad a yezh ofisiel e Breizh e sav a-du R.P.R.-U.D.F. 22, Pobl Breizh ur bobl en Europa 22, Re C'hlas 22, Re C'hlas 29, Pobl Breizh ur bobl en Europa 29, C.R.B. 29, Pobl Breizh ur bobl en Europa 35, Re C'hlas 35, Pobl Breizh ur bobl en Europa 44, Pobl Breizh ur bobl en Europa 56 ha Génération Ecologie 56. Un emzalc'h un tamm dishenvel zo gant penn listenn R.P.R. - U.D.F. 35 : "le breton est la langue des bretons" emezañ, "et n'a nul besoin d'un statut officiel qui n'ajouterait rien à son existence et à son autorité".

Gant ar goullenn ma vo tachenn eus ar vuhez foran e sav a-du R.P.R. - U.D.F. 22, Pobl Breizh ur bobl en Europa 22, Re C'hlas 22, C.R.B. 29, Re C'hlas 29, Pobl Breizh ur bobl en Europa 35, Re C'hlas 35, Pobl Breizh ur bobl en Europa 44 ("il va de soi que cet objectif n'a de sens qu'assorti d'un calendrier de mise en oeuvre des moyens qui permettront de l'atteindre" emezo), Pobl Breizh ur bobl en Europa 56 ha Génération Ecologie 56.

Gant an trade goullenn ma vo krouet ur ganol skinwel e brezhoneg evit Breizh en he fezh ez eo savet a-du Pobl Breizh ur bobl en Europa 22, R.P.R. - U.D.F. 22 Pobl Breizh ur bobl en Europa 29, C.R.B. 29, Pobl Breizh ur bobl en Europa 35 ("gant ma vo studet pizh en araok ar raktes (où) a vefe posubl kas da benn da vat da c'houde"), R.P.R. - U.D.F.

35 ("... la difficulté résidant sans doute dans le financement de leur fonctionnement"), Pobl Breizh ur bobl en Europa 44, Génération Ecologie 56, Pobl Breizh ur bobl en Europa 56. Dishañvel a-walc'h eo respontoù Re C'hlas 22, 29 ha 35 : "un service public de communication audio-visuel brétonne donnant ... à la langue bretonne toute la place qui lui revient"...

Gant ar pevare goullenn ma c'hallar bezañ kelennet e brezhoneg eus ar skol-vamm d'ar skol-veur ha ma vo ret deskiñ brezhoneg pa zibabor ar skol c'hallek ez eo savet a-du Pobl Breizh ur bobl en Europa 22 ("penaos ober e mod all ?"), R.P.R. - U.D.F. 22, Pobl Breizh ur bobl en Europa 29, C.R.B. 29, Pobl Breizh ur bobl en Europa 35, Pobl Breizh ur bobl en Europa 44, ha Génération Ecologie 56. Re C'hlas 22 ha 29 a zo dishañvel a-walc'h o emzalc'h : "... l'enseignement de la langue bretonne sur la base du volontariat inversé ... ceux qui ne souhaitent pas suivre cet enseignement doivent le faire savoir". Re C'hlas 35 o kemer mennoz reoù 22 ha 29 evit Breizh-Izel hepkan hag oc'h ouzhpennañ, evit Breizh-Uhel "enseignement dans toutes les classes sur la base du volontariat". A-enep e sav listenn Pobl Breizh ur bobl en Europa 56 ("cela nous paraît aller contre l'intérêt de la culture bretonne") hag R.P.R. - U.D.F. 35 ("enseignement de la langue bretonne dans des classes spécialisées").

Pempvet goullenn Stourm Ar Brezhoneg a oa "peseurt politikerezh evit kas war-raok yezh ha sevenadur Breizh er gevredigezh ?" Savet eo an holl gant ober ar pep gwellañ : termeniñ ar politikerezh-se a vo ranket ober ha n'eo ket reiñ yalc'hadou nemetken (Pobl Breizh ur bobl en Europa 22), "... notre liste ... souhaite poursuivre la politique très active menée dans ce domaine par le Conseil Régional, en liaison très étroite avec les actions conduites par les Conseils Généraux, en particulier celui du Finistère auquel j'appartiens" (R.P.R. - U.D.F. 29), "... nos candidats millerons (sic) ... pour que la politique culturelle favorise la renaissance des langues régionales prises comme vecteur du développement régional lui-même" (France Unie 44). Ar goullenn-mañ a oa bet graet a-benn sikour ar Vretoned da ober e mennoz ha mouezhiadeg an 22 a viz Meurzh hogen dav e vo d' ar guzulierien nevez dilennet ober diouzh ar pezh a embannont hiziv ha da Vreizhiz pouezañ warno evit ma kasient al labour da vat. Stourm Ar Brezhoneg avat a chomo war evezh. S.A.B.

- Setu amañ, dre zepartamant, ar roll anezho :
- 22 - RPR - UDF, PCF, Pobl Breizh en Europa, Re C'hlas
 - 29 - Re C'hlas, Pobl Breizh en Europa, PCF, RPR-UDF, CRB
 - 35 - Pobl Breizh en Europa, PCF, RPR-UDF, CRB
 - 44 - France Unie, Peuple Breton Peuple d'Europe
 - 56 - Peuple Breton Peuple d'Europe, Génération Ecologie
- Diouzh ar respontoù hon eus bet e welomp ez eus muioc'h-mui a dud preferet gant dazont hor yezh, ha labour omp o welet ez eus bet taolet frouezh gant labour Stourm Ar Brezhoneg. Bez' e ranker lavaret memestra hon eus bet lizhriñ na respontent ket d'hor goullenn, met a glasker en em guzhat a-dreñv programmoù hollek ha difetis (evel ar P.C.F.) pe a-dreñv komzoù direlis ha touli a-walc'h (evel UDF-RPR 29 pe France Unie 44).

Dizarmañ

Amginañ an oberiadenn gant Y.B. Kelvenneg

Gant ar Stadoù-Unanet hag ar Republikoù bet Soviedel ez eus bet boulc'het, evit dispennañ an armoù nukleel, ur roll-labour dezhañ un ampled ha na vije bet den ebet evit e gavout posupl, n'eus nemet un nebeud mizioù zo. Emplegañ a ra dispenn 20 000 karg-brezel, o vont eus armoù taktikel betek bombezennoù hidrogen liesmegatonek.



Kudennoù an divontañ

Argerzh an dispenn armoù nukleel a vez dalc'het dirgel-mat, en abeg nemetken ma 'z eo divontañ un arm an amgin eus montañ anezhañ - ne fell da zen riskiañ da reiñ aroueziadurioù talvoudus da ober ar Stadoù-Unanet hag ar Frañs e vez raktraset an armoù nukleel en ur zerc'hel soñj ez int tonket da vezañ dispennet en diwezh. Plezioù ar c'hornog o deus divontet o c'hargoù-brezel kozh ez ingal abaoe 1950, hag adimplijet ar materi evit ober armoù arnevesoc'h. Evito ez eo an divontañ ul labour boas, daoust dezhañ bezañ un argerzh koustus hag a zispign kalz amzer, implijout a ra aveadurioù

gourijinekaet evit pellembreged danvezioù dahjerus.

Nebeutoc'h a skiant prenet a zo a-hend-all gant an ez-Unvaniezh-Soviedel evit pezh a sell ouzh divontañ hag adsiklañ an armoù nukleel. Er c'hazadoù bet sanailhet ganti ez eus kargoù-brezel kozh eus ar bloavezhioù 60, ha seul danjerusoc'h an traoù ma vez dilezet o labour, war a lavarer, gant ur maread eus an deknikourien bet stummet da zerc'hel an armoù-se aratre, digalonkaet ma 'z int gant diskar ar reizhiad vilourel soviedel ha peogwir n'eus mui gour o paeañ dezho goprou dereat.

John Simpson, un arbennigour war an nukleel, o labourat e Kreizenn

Mountbatten ar Studioù Etrevroadel eus Skol-Veur Southampton, a lavar ez eus bet displeget dezhañ gant Rused hag a zarempred anezhañ, "ez eus ganto armoù ha n'int ket bet graet evit bezañ divontet. Neuze ez eo, koulz lavarout, diwar mann e rankimp ijinañ hentenoù evit diraez ar galonenn tisil enno."

Prenañ o deus graet ar Rused koulskoude un tamm skiant war an divontañ, evel m'eo bet lakaet sklaer en ur pennad embannet e Moskov, gant Viktor Makhailov, eil-madidiern an ijineriezh hag an energiezh atomek. "E gwirionez emañ hol labouradegoù o labourat muioc'h dija war an divontañ kargoù-brezel eget war ar produñ reoù

nevez," a zo bet skrivet gantañ.

An divontañ a rank bezañ graet e kambrou ispisial gwarezet gant betoñs kreñvaet, e ken kaz ma c'hoarvezfe ur gwallarvoud. N'eus ket a riskl e vefe un darzhadenn nukleel beurglok. Hogen an danvez-tarzh ordinal implijet evit enaouiñ ar c'harg nukleel a c'hell tarzhañ, dreist-holl e-barzh ur vombezenn gozh ha na vefe ket bet dalc'het a-ratre. Ret-mat e vefe an endalc'hidigezh neuze evit miout ouzh ar Plutonium - anezhañ ur metal skinoberus ha pistrus - da vezañ diaosket en amved.

Er c'hornog, an danvez-tarzh ordinal bet lamet diouzh ar c'hargoù-brezel a vez distrujet dre loskidigezh kontrollet. Gouez da vMikhailov e vez implijet a-wechoù gant ar Rused evit ober diamantoù sintezek; pa vezont lakaet da darzhañ e kambrou siellet, e c'hoarvez gwaskoù uhel a-walc'h evit treiñ grafit - stumm uhel ha du ar c'hadon - e diamant. Diouzh brasjedadurioù graet er c'hornog e vefe kambrou a-walc'h e Rusia evit divontañ etre 1500 ha 2000 karg-brezel bep bloaz. Kement-mañ a zo da vezañ lakaet e skoaz gant ar 15 000 karg a zo da vezañ dispennet hervez ar steuñvoù bet kinniget betek-henn gant ar Rused. Baz' ez eus ouzhpenn miliadoù armoù kozh bet sanailhet hag a stign emic'hañs ar gwashañ kudennoù evit pezh a sell ouzh an divontañ.

Ar Rused o do ezhomm eus skoazell ar c'hornog da sevel labourvaoù digefridañ, ma fell dezho en em zizober eus o armoù buan a-walc'h. "An doare anat da vont buanoc'h gant an argerzh divontañ a vefe sevel muioc'h a gembrou," eme Simpson. "Hogen ur gudenn a zo amañ. Kambrou savet evit divontañ a c'hell bezañ troet aes a-walc'h e kambrou aozet d'ober ar c'hontrol-montañ kargoù-brezel - , ma'z afe ar soubenn bolitikel da drenkañ."

Hanter ziskoulmoù

O lakaet e penn-kont an distalibled a c'helle ober he reuz e stadoù an Unvaniezh kozh, e soñj kalz arbennigourien war ar paoterezh, e tlefe ar c'hornog lakaat ar pep brasañ eus e sikourioù da gadarnaat surentez fizikel ar c'hargoù a zo da vezañ tennet kuit, kentoc'h eget da zivontañ anezho. Se a dalvez kement ha degas anezho en ur greizenn-sanailhañ gouarnet a-zoare e Bro-Rusia, lakaat ar c'hargoù diarnar hag o zarc'herien dioberiant. Renet Ensavador ar Studioù Strategiezh a lavar e vefe divontañ klok

ar c'hargoù-brezel "gwashoc'h eget lezel anezho anterin" nemet e vefe deut a benn da sevel emglevioù peurzifaziuz da ziwall an danvez nukleel a zeufe diouzh ar bombezennoù.

Burev Etrevroadel an Energiezh Atomek, staliet e Wien, a zo mmenet start da ledenaat e gefidi a-vremañ, a zo ensellout an aveadurioù nukleel trevourel er bed a-bezh, ha stagañ gant ensellout ar plutonium hag an uraniam pinvidikaet tennet diouzh an armoù, evit diogeliñ ne vint ket distroet en-dro da implijoù mliourel.

Unan eus an hegasusañ goulennoù a sav diwar an dizarmañ nukleel eo petra ober gant ar plutonium a zerezh armerzhel. Er Stadoù-Unanet ez eus d'ja ur c'hementad prizet da 50 tonennad a plutonium, o tont eus kargoù reputeat, pe produet evit implijoù mliourel da zont, ha ne vo ket ezhomm anezho ken, hag an armoù lakaet er-maez a implij e-pad ar bloavezhioù o tont a c'hano muioc'h anezhañ c'hoazh.

Produñ energiezh e krezennoù tredan a zo un implij trevourel anat eus ar plutonium. Ar seurt reaktor avat, raktreset evit mont en-dro diwar plutonium, ar primc'houennner, a zo pell c'hoazh a vezañ lakaet war ar marc'had. Evit bezañ implijet en ur reaktor termikel ordinal e rank ar plutonium bezañ toueziet gant uraniam e stumm ur gor oksidenn kemmesket (MOX).

"E sell eus arvezioù an enep-paoterezh eo gwellañ implij ar plutonium leskiñ anezhañ e stumm ur gor oksidenn kemmesket," eme David Kid eus an IAEA. Kat tud en ijineriezh nukleel a zo a-du, reoù all avat a zo amgredik diwar-benn adsiklañ ar plutonium er giz-se, rak koustusoc'h ha diaosoc'h eo da implijout eget gor uraniam digemmesk. "Adsiklañ ar plutonium a zo displetus," eme William Walker eus Skol-Veur Sussex. "An darn vrasañ eus ar plutonium a zo er bed, a rank bezañ sellet n'eo ket evel ur peadra talvoudek hogen evel dilerc'hiadennoù a ranker en em zizober diouto."

Eus bezliadur e donder an douar betek bannerezh en ec'honder pellañ ez a ar c'hinnigoù evit dilemel ar plutonium. Gour avat n'en deus kinniget ur raktres hag a vefe greus ez-teknelik, a zerefe ouzh an amved, hag a c'hellid e c'hoarzañ e sell eus politikerezh ■

Dwar: "REVERSING THE OPERATION" gant Clive Cookson and David White embannet gant ar FINANCIAL TIME

Difennet skrivañ c'homlec'hoù e Brezhoneg

Kaset e oa bet ur reked d'ar C'huzul-Stad gall gant Klaod an Duigou, eus an Oriant, a-enep d'un disentez a-berzh Ministr ar Postoù a nac'he kas lizhiri gant ar c'homlec'hoù e brezhoneg.

Nac'het en deus ivez ar C'huzul-Stad e vije eus ar gwir-se, pa n'eus lezenn ebet (evit c'hoazh) a redi an dud da ober gant ar galleg.

Tostaat a c'haller ar varnedigezh-mañ ouzre ne all ar C'huzul-Stad etre 1940 ha 1944.

Hervez Olivier Dupeyroux en deus studiet an disantezioù-se (*), en doa ar C'huzul-Stad asantet e vije laketañ al lezennoù anepyzev da dalvezout al ledanañ ar gwellañ.

Gant ar memes spered e talc'h ar C'huzul-se da labourat hiziv. Dac'h a-enep ar yuzevian, hiziv a-enep ar vrezhonegerien.

* Olivier Dupeyroux : "L'indépendance du Conseil d'Etat statuait en contentieux" e-barzh ar "Revue du droit public", Mae-Mezheven 1983.

Mark Kerrain

Kemennadenn

Skourr Breizh ar c'hendalc'h Keltiek en deus klevet e oa bet nac'het gant renieren ar Post Pann-ar-Bed hag al Liger-Atlantal degas lizhiri, skrivet o c'homlec'h e brezhoneg. Hag e miz Ebrel ez eo bet barnet gant ar lez-varn Conseil d'Etat en doa ar Post ar gwir da nac'hañ.

Un diviz a-seurt-se ne c'hell ket bezañ lasket hep respont. Setu perak e c'houlenn ar skourr a vefe tennet kuit gant an holl Vretoned o arc'hant eus ar CCP, evit lakaat ar Post da gompren ne c'hall ket mont a-enep da youl ar boblañs. ■

Ur vroad all war hent he dizalc'hiezh

Ur vammenn a drubuilhoù en Europa

gant Reun an Hir

Daoust m'emañ c'hoazh ar brezel oc'h ober e reuz e Yougoslavia eo deuet ar Groated a-benn da vezañ anavezet evit ur bobl dizalc'h. Tra ma voe renket buan a-walc'h, er c'heñver-se, kudenn Slovenia e voe ret d'ar Groated talañ, n'eo ket hepken ouzh enebiezh ar Serbed, met ivez ouzh hini Vro-C'hall na felle ket dezhi reiñ hec'h asant d'ur vroad groatiat dizalc'h. Feal e chome ar C'hallaoued d'o mignoniezh d'ar Serbed abaoe m'o devoa o skoazellet e 1918 da astenn o beli war ar pobloù a voe savet Yougoslavia diwarno, dre hag evit darn anezho... Ret e voe d'an Alamagn teurel he fouez er breutadennoù dizivezh a lakae Stadoù "Kumuniezh Europa" da sevel an eil a-enep eben diwar-benn ar gudenn-se.

D'an dud dic'houvez a-grenn, evit ar braz anezho, eus an abegoù a lakae ar Groated da stourm evit o frankiz, o yezh hag o douaron hengounel e voe roet da intant ne oa ket deliozek ar bobl-se da gaoat an distañ tamm skoazell digant broadoù bras Europa an "daouzek". Daoust ha ne vefe ket lakae ar paoch en arvar ma vefe lezet sponterien diduez d'ober o reuz, o klask bruzañ ur strollad broioù a oa bet rann eus Europa abaoe diwez ar c'hentañ brezel-bed ? Ur vroad nevez bet savet gant an drec'hounien diwar dismantrou an impalaeriezh enebour ? Ur vroad hag a oa bet gouest da dalañ ouz URSS gailoudus dindan renerzh poellek ar marichal Tito ? Rak evel-se e vez savet al levrioù-istor e Bro-C'hall en ur virot na vefe meneget enno fed ebet a zeufe da deñvalaat ar skeudenn disi a zo bet dibabet evit heñchañ ar speredoù war an tu mat.

Propaganda

Kerkent ha ma taraas an emgannoù, avat, e kavas d'ar media e oa poent bras lakae harz d'ar Groated en ur zegas da soñj o "helon" ouz ar "Re Unanet" e-pad ar brezel-bed diwezhañ. Pernaos, eta, e c'halle ar vro vitan-se bezañ dichek a-walc'h evit goulen he frankiz ? Arabat e vefe d'ar broioù "dereat" ankouachaet e teuas Kroatia da vezañ ur vro dizalc'h e 1941 d'ur mare ma veze lod brasañ pobloù Europa o c'houzahn dindan seuloù pouner an estren ! An namm dilamadus, arouez ar pec'hed marvel a zoug c'hoazh Kroatia war he

zal ha mezh da neb a gredfe mont d'he sikour !

Ken abred hag ar bloaz tremen e voe kemeret o diarbennou gant ar seurt "peoc'hgarourien-se" e-keñver Slovakia. Hep gortoz na savfe reuz er vro-se e voe klasket ganto lakaat Slovakia er memes sac'h gant Kroatia en ur damall dezhi hec'h amzer dremenet pa voe deuet da vezañ ur Stad dizalc'h diwar ar bloaz 1939 goude diskar Tcheko-Slovakia. E dibenn ar bloaz 1991 e oa tu da lenn er gelaouenn "Le Monde Diplomatique" ur pennad diwar-benn Slovakia gant an titl : "Ur vammenn a drubuilhoù e Kreizeuropa. Hoaleet eo Slovakia gant an disrannerezh". Diskuliañ a rae ar skridaozer al liamm start a vez evit ar Groated etre ar vroadelouriezh hag ar gatoligiezh. Katolik roman eo ar braz eus ar Slovakid ha n'eo ket souezhus e vefe ul liamm etre o rejiljon hag o broadelouriezh pa ouzer ne voe aotreet, e-pad pell, ar studi d'ar bobl-se nemet war dachenn an deologiezh ! Ac'hano an niver bras a veletien a gaver e-touez pennadurezhioù ar vro-se. Disklariet e voe Republik Tcheko-Slovakia gant an dTcheked o-unan d'an 28 a viz Here 1918, daou zevazh a-rack an deiz ma oa Kuzul Broadel Slovakia d'en em vodañ ha ne voe dalc'het kont ebet eus ar promesaoù kaer a oa bet graet d'ar Slovakid e Cleveland (1915) hag e Pittsburg (1918), e-keñver an aozadur kevreadel da vezañ roet d'ar Stad nevez. Ne voe nemet ar Rutened, o Reter ar vro, a voe roet dezho un tamm emrenerzh, pe seurt lavaret. E miz Here 1938 e rankas gouarnamant Praha reiñ he emrenerzh da Slovakia. D'ar 14

a viz Meurzh 1939 e savas Breujoù Slovakia a-du gant an dizalc'hted. Dan diskleriadur-se, avat, ne voe ket Praha e-tailh da reiñ hec'h asant o vezañ ma ne oa mul a dTcheko-Slovakia an deiz war-lerc'h.

Stad bet...

Ganedigezh kentañ Republik Slovakia, disklariet hervez bonreizh ar vro, a voe anavezet gant 27 Stad, Bro-C'hall en o zouez. Oc'h ober dave d'an anavezadur-se, ha n'eo bet morse dislavaret, e fell bremañ da bennadurezhioù Slovakia adlakaat o bro en he sav da reiñ dezhi he sked en-dro o nachañ groñs e vije bet Slovakia nepred dindan beli an nazied a-hed hec'h istor. Rak, emezo, ne oa ket Slovakia ur vro dindan gwarez Alamagn evel Bohemia ha Moravia nag ur vro hanteraloubet evel Bro-C'hall e 1940.

O c'hounit an diaubidigezh d'ar mare-se eus hec'h istor he deus gelllet Slovakia kas da benn hec'h azvidigezh war dachenn ar politikerezh hag ar mererezh-bro. Ma lakae e voe savet ar Stad Slovakia en despad d'ar gwir etrevroadel e ranker teurel gwashoc'h barn c'hoazh war savidigezh ar Stad tcheko-slovakia a voe krouet a-bennfont war goulen Bro-C'hall, dreist-holl, a felle dezhi sevel ur voger-difenn en-dro d'an Alamagn war-bouez ur steudad Stadoù feal d'he folitikezh. E 1938 en em gavas an hevelep mistri evel e 1918 war al leur-c'hoar : Bro-C'hall ha Bro-Saoz. Diwar emglev München e voe kaset ganto ar c'hentañ argad ouz beli an dTcheked ken e voe



diskaret Tcheko-Slovakia a-bezh. Diskuliañ an emglev etre an Alamaned hag ar Slovakid, etre 1939 ha 1945, e-giz ma ra ar C'hallaoued, a dalvezle kement ha droukkemer an abegoù evit an efedoù. Splann e teu war-wel an diforc'h a oa bet etre ar stivoù graet d'ar mare-se gant tud vevrel evel Benes ha Mazanyk hag a veze lezet an diviz ganto, anat eo, ha stivoù an eskob Tiso n'en doa ken preder nemet lakaat ar gwivoud hag ar reizh da gengloañ. Tamall gouarnamant Slovakia da vezañ gwisket un neuz "kloarel-faskour" - un droien hag a zo blaz ar "Reter" ganti - a vefe ur fazi : n'eus bet a zen-a-liz e renerzh ar Stad Slovakia estregat an eskob Tiso o-unan. Kadarnaet eo bet an den-se en e garg gant ar bobl a-bezh, ganti holl eskibien ar vro, gant ar Yuzavien ha betek gant dalc'hidi Alamagn zoken. N'eo ket e Slovakia hepken e voe gweliet, "en amzerioù

teñval hon istor" gouarnamantoù harpet gant an liz. Kenkouz al e roas an liz he skoazell da renerien Stadoù evel Bohemia ha Moravia ha da re Vro-C'hall da vare ar Stad-C'hall etre 1940 ha 1944. An darvoudoù a zegasas disrannerezh Alamagn goude ar brezel a reas ivez da Slovakia koll he dizalc'hted. War-lerc'h aloubadeg ar vro gant an Arme Ruz e voe eskemmet Slovakia ouz Rutenia (Ukraina Iskarpatek) a zeuas neuze da vezañ darn eus an Unvaniezh Soviedel. Chom a reas ar vinorelezh hungariat war he douaroù e Slovakia, avat, tra ma voe argaset Alamagn ar vro-Sudat war goulen Edouard Benes.

... Ha Stad da zont ...

Ne vez ket displeget doomp, an deiz hiziv, perak ne voe ket diskoret ha emrenerzh da Slovakia goude diskar ar

renad kumunour unvani e Praha. Bez' o deus an dTcheked ezhomm eus Slovakia e gwirionez evit diazezañ ha diogeliñ o broadeliezh dezho o-unan ha karout a rafent ober gant ar gevredalezh evit astenn adarre o beli war Slovakia. Evit maizañ emalc'h ar Slovakid e-keñver ar gevredalezh e c'heller o c'heñveriañ ouz pobloù "zo eus ar C'hornôg, Bro-C'hall dreist-holl, a chom aniek rak an "dreistvroadelezh" a zo kinniget dezho gant "Europa an daouzek". Evit abegoù heñvel n'emañ ket ar Slovakid a-du gant ar referendom "kevreadel", erbedet gant Vaclav Havel, ha na rofe dezho nemet ar bihanañ-niver en ur Stad tcheko-slovakia. Hervez ur sonterezh savonet nevez "zo ez afe ouzhpenn 50% eus an dud a-du gant an ingalded e-keñver an dTcheked. Ar re a vefe a-du gant an dizalc'hted rik a zo 25 o dregantad.

E-keñvar ar gwir etrevroadel e vefe Slovakia en he reizh o c'houlenn bezah ur stad dizalc'h, hervez bonreizh Republik kevreadel Tcheko-Slovakia, da gentañ, ha d'an eil dre m'eo bet anavezet div wech evit Stad dieub en hec'h istor : e 1919 gant ar Soviedoù hag e 1939 da vare ar Stad Slovakia. Kement-se ne vir ket ouz ar media a vegenih, an duañ ma c'hellont, ar riskloù, an trubuilhoù a bep seurt a zegasas ur Stad Slovakia dizalc'h : morlozh an armeoù, emerezh ar vMoraved hag an Hungarid, adreizhadur an harzoù, hag all...

Emell nerzhioù habaskaat a rafe d'an dTcheked krennañ o rogoni. Kudenn ar vMoraved a zo hini an dTcheked. Evit an Hungarid, ma n'eo ket deuet an dTcheked a-benn d'en em givout gant ar Sudatiz, n'eo ket lavaret ne vefe ket ar Slovakid gouest d'en em givout gant ar v-Magiarid, seul selloc'h ma n'eo ket bet argaset ar re-se eus ar vro evel ma'z eo bet an Alamaned gant an dTcheked goude an eil brezel-bed. Diskredin war harzoù kreisteiz Slovakia a dalvezle kement hag arvarin war devegezh harzoù reter Bro-C'hall pa war adurvanidigezh Alamagn.

Keleier war 3615 KELA bemdez bemnoz

KELA BP 2554
35059 Roazon Cedex
0 99 87 69 12 Faks 99 63 82 28

Inizi Maloù Dek vloaz war-lerc'h ar brezel

Dek vloaz 'zo d'an 2 a viz Ebril 1982, e tilestre soudarded Arc'hantina a-hentadoù war lanneier inizi Maloù. Ne voe ket Londrez evit asantiñ da goll he beli warno pa oa bet gwallaonet hec'h enor gant an taol-nerzh. Bet trec'het da gefiver ur brezel a voe falc'het 1000 a dud en e bad, e rankas Buenos Aires restreurel an douaroù avelek-se d'ar Rouantelezh Unanet 74 devezh war-lerc'h.



An Itr. Thatcher, ministri kentañ

Rouantelezh a-benn da zourañ divoued ha seizet gant ar riv, ne voe ket an enrollidi yaouank a stumme ar braz eus bagadoù Buenos Aires, evit ar vrezelourien a vicher a zeue dezho.

Un tamm istor

E 1833 eo e voe diskennet gant ar Saozon, mesaerien Skos war an inizi dizanvez-se. Laket e voe ganto defived da beuriñ war al lanneier a oa bet dilezet gant trevidien Akadian a orin p'en doa divizet Pariz fizioù ar vali warno e Roue Bro-Spagn. Peadra a oa en o farkeier da voueta tost 800 000 a loened. Etre an daou vrezel bed e teuas ur paramantour eus an Haor Nevez da brenañ un tropeil diganto a-benn ober memes tra en Inizi Kergelenn. O vezañ ma oa diampart e vesaerien war ar vicher, e reas tro goull.

An enezourien a vez graet kelperien anezho, un anv o tont eus ar ger "kelp".



Taer ha koustus e voe ar stourm etre an div genel

a dalvez kement ha bezhin, ar bezhin a zo gobet stank ganto strad ar mor e-harz aodoù Inizi Maloù. Ouzhpenn 2000 emaint hiziv an deiz, 1600 anezho o chom e Bourc'h Stanley. O vezañ ne dro mui brav an traoù gant ar gwerzhañ kig ha gloan war ar marc'hadoù etrevroadel ne c'hellont mui bevañ diwar ar sevel defived hepken. Dra chañs emañ ar berzh graet gant ar pesketa o reiñ ul lañs dic'hortoz da ekonomiezh ar vro. Kenderc'hel a ra koulskoude ar braz eus ar boblañs da bleidiñ gant ar vicher mesaer. Perc'hennet ez eus lod atantoù gant kompagnunezh an Aotrou Thatcher, gwaz an "Itron Houarn".

Un dazont diasar

Skrivet eo e anv gant lizherennoù bras war tabenn e skornid, pezh a laka an Arc'hantiniz da fuloniñ.

"Abaoc'h fin ar brezel ne vez mui skoulmet an disterañ darempred gant ar vro amezek. O vezañ ez eo deut stankoc'h mont-dont ar c'hiri-nij etre Stanley ha Londrez, n'eo mui Inizi Maloù al lech distro ma oant dek vloaz 'zo. Nouspet batimant a ziskenn bremañ o eorioù, dirak o aodoù. Gant al lusk roet d'an traoù ez eus bet degaset kemmoù bras e mod bevañ ar gelperien ha kaoz eo kement-se da zistro lod enezourien divroet.

Hag aon o defe ar gelperien na glaskfe lu an Arc'hantiniz skeiñ ur wech adarre war-du o c'herreg ? Evit taliñ ouzh un hevelep arsiñ ez eus bet lojet 3000 a soudarded sternet mat en o c'hichen, pezh a goust ker abominabl d'ar Rouantelezh Unanet. Salv ma strivo an div vroad da glask asambles un diskoulm d'ereat d'ur gudenn a zo hec'h orin en un istor na c'heller ket kemmañ.

Paol ar Meur

Ar broadoù oc'h adsevel

Andrev Frossard, anezhañ ur c'homunour kanttroet d'ar feiz kristen hag ezel eus "Akademiezh Vro C'hall", en deus embannet nevez 'zo ul levr diwar-benn Yann-Baol II a gaver ennañ ur varnadenn war an darvoudoù c'hoavezet e Reter-Europa. Selu emañ da heul un tamm anezhi, diwar-benn adsav ar broadoù du-se. Reiñ a ra da gentañ e soñj-dezhañ diwar-benn petra eo ar vroadouriezh.

"Un tiagazh eo ar vroad, tra ma 'z eo ar vroadouriezh un dra difatis. Krediñ a ra ar pab ar broadoù evel ma kredet ez eus tud a bep seurt, met pellaat a ra diouzh e spared ar vroadouriezh, a izela ar politikerezh betek sellout outañ nemet evel ur gont a geñveriekadurioù-nerzhioù, hag a izela ivez ar vuhezgezh evel pa vije nemet ur roll gouc'hemennnoù groñs o tont diwar ar bondoug gouenn-virer. Broadoù kristen ez eus bet anezho. Ne c'hell ket avat bezañ eus ur vroadouriezh kristen. Ma vije bet eus kelennadurezh ar vroadouriezh er Grennamzer, war eo he dije rebec'het taer d'ar roue sant Loeiz bezañ roet en-

dro bro-Gwienna d'ar Saozon 'evit lakaat ar peoc'h da ren etre bugale an eil rouantelezh hag eben", kement-mañ hep bezañ rediet d'hen ober dre-heg. "Ar vroadouriezhioù oc'h adsevel" e Reter-Europa a zo un anadenn na c'heller ket, e doare abal, lakaat war gont ar vroadouriezh. E-pad dekvloavezhioù, ez eus bet gwasket pobloù, ouzh o zrevac'hañ a niveroù bras, evel ma voe kont gant annezidi eus ar broioù baltek, ouzh o didammañ evel Armeniz, ouzh o stagañ ouzh kêrbennoù estren, ouzh o daouhanterañ gant paotred o c'hraion tev e faourenniglev Yalta, ouzh o sujañ d'ur rejlijon emni tra ken nemet gaou, diskredik, ha diazezet war ar polis, dillo da c'hweza an den disuj ha da grougañ an disvoudour...

Ha pa sant tud ar pobloù-mañ, heskinet en o c'horf hag en o spered, o 'n em zistardañ an dorn a zo o stardañ o c'horzailhenn, kentañ tra a adkavont kerkenet ha kroget da gomz en-dro, eo adober gant o yezh, ha deuet dezho en-dro an emskiant eus o hiniennelezh e teu hini o sevenadur hag hini o henvoazioù. Dre hag o deus ranket

mont da heul patrom ur gevredigezh hep istor nag efivor. An eil hag eglie o deus adkavet kerkenet ha diskaret ar pimpatrom, ha gant o frankiz gounezet, pe evel lod eus ar republikoù soviedel bihan, a-raok bezañ dishualket zoken, emaint o c'houlenn groñs o dizalc'hagezh hep na vije gant ar c'hoant-se liv ur vroadouriezh met hini un hiniennelezh o 'n em adparc'hennañ.

N'eo ket broadouriezhioù eo a vez oc'h adsevel e broioù ar Reter, tud kig hag eskern ne lavaran ket.

Merzout a ra ar pab a-hand-all n'eo ket kement-se republikoù bras an URSS, met kentoc'h ar re vihan a ziskleir o frankiz gant ar muiañ a virvidigezh. Dre m'o deus o fobioù muioch a voazioù hag a efivorioù boutin. Ar republikoù bihan a denn d'ar savadurioù a digazh-se a vezer douget da sevel en-dro d'un iliz. Ar riezioù bras a gavel gwelloc'h kazarnañ an dud e-barzh tier-soudarded

(troet gant T.G. & F.M.)

Keñveriekadurioù-nerzhioù = rapports de forces. Bondoug gouenn-virer = instance de conservation. Anadenn = phénomène. Trevac'hañ = bacheañ en un drev, départir.

Preder : bezañ en e gaoud gant Yann Manegwenn

Tud 'zo ne savont ket diouzh ar mintin. Ha pa savont ne zihunont ket evit kelou-se. Chom a reont er stad-se betek an noz, betek ar poent da vont da gousket adarre ... Chom a reont e bed o faltazi, pe gentoc'h e vez maget dezho o zuadur faltaziak dre an en-dro ma vevont ennañ, gant ar skinwell, sonerezh droch ar radio, gant ar c'hazatennoù goull, ha zoken alies gant o labour, p'o davaz unan. Chom a reont en o bed voulouz, disouris, dinec'h ha dibaon, tamolodet ennañ betek bezañ diemskiant war ster don o buhez, o c'hoant nemetañ o vezañ derc'hel da vevañ evel-se hep soñjal, pe c'hoazh o «chom da soñjal» a dalv «chom hep ober netra» ! Gwir eo alies : yen eo an diavaez, diasur, garv, didreuz, digar ... Met an diavaez-se eo ar gwirvoud, ar bed gwirion ! An den eta e oa lakaat e spered da chom war zihun a-hed an

devezh e c'heller lavarout en un doare diwar e benn ez eo, dre e oberoù, muioch dan eget un all. Gouzout a ra e rank divorfiet e iziliñ evit dihuminiñ e spered. Kement-mañ eo a zo «Bezañ en e gaoud» (*).

Evit an emsaver, bezañ en e gaoud a zo bezañ breizhat en e oberoù, par ma c'hell ha penn-kil-ha-troad, met n'eo ket en e benn hepken na daou zevzher ar sizhun d'ar muiañ, gant migoned ! Kement-mañ a c'houlenn strivoù bras, ober aberzhioù alies e-keñvar doare-bevañ, arc'hant, hag all, ha perzhioù denel gwirion a ranker da c'hounid avit padout en e vennad ...

An doareoù asañ n'int ket alies ar re wellañ met arabat kennebeut dibab doareoù re zias gant aon da c'hwiñañ. Da gement hini ac'hanomp eo eta lakaat sklaer petra eo e bal ha dibab, mennet mat ha gant furnezh, an doareoù da skeiñ war-du ennañ. En ur

ger, bezañ finvezelet mat.

Amañ e ranker anzav e ro ar feiz un dra en devo unan difeiz muioch a boan da dizhout : kaout e vout finvezelet. Ar c'hristen, forzh petra a c'hoarvezfe, a oar emañ Doue o wellañ warnañ hag ouzh e vennigañ, forzh peseurt frouezh a welte o tont diwar e labour. Goude-se ez eo un afer a youl hag a zalc'husted. Aze c'hoazh e oar ar c'hristen e vo sikouret gant Doue, gant ma kroge e-unan gant an hent, rak gouzout a ra ervat, o vezañ pe'c'her, na zauto ket a-benn "hep sikour Doue". Derc'hel a ra da vont o fizioù pap tra ennañ. Sellit ouzh ar pezh a zo c'hoarvezet er Reter : ar reizhiad vac'homer komunour, daoust dezhi bezañ dihar e c'halloud, a zo bet diskaret a war e seblant bepred, diouzh an diavaez - koulskoude hep skuilhañ ar gwad. E-vel-se e vo adsavet Breizh, gant tud en o c'haoud, tud a feiz pe gat. Bezomp eta en hor c'haoud e kement tra bihan a reomp, hag e tevio ar maout ganimp. (*) s. o. pennad "Boudoniez" Roperzh ar Mason, Gwalarn niv. 154-155. "Etre en acte" e gallec

Louzeier ha boued etrezek Metkovic Labour ar c'homite skoazell Breizh/Kroatia



War ar foto-mañ e weler T. Jirourel lefzonier ar c'homite, a-gleiz, Nikola Raguz eo ar povarvet den adalek an tu-kleiz. Izili eus ar c'homite eo an dud vras all

Ur gasadenn boued ha louzeier a vo graet gant Skoazell Breizh-Kroatia. Da gâr-Metkovic ec'h ay ar pourvezioù kentañ-se. Lañset e oa bet skoazell Breizh-Kroatia un toulad mizioù'zo c'hoazh. E-touez traoù all e oa en sell da gas boued ha louzeier da Croatia, kenkent ha ma vije

Gant ur c'hroat o chom e-kostez Paris, mignon gant krouer ar c'homite, Nikola Raguz, ur c'hroat eus Bosna-Hertsegovina, o chom e Parroz-Gireg abaoe 1978, an hini ez euz bet pignet ur c'harr-samm a-benn ar fin.

War-dro 1200 lur-bouez a louzeier ac'h ay kuit eta etrezek ospital Metkovic. A-hend-all e vo roet boued ha dilhad d'ar repuidi a zo bremañ e Metkovic.

Fiziañs o deus tud ar c'homite e c'hellfont skoulmañ darempredoù, pa vo echu ar brezel, gant ar Groatet, war tachen ar sevenadur hag ar sonerezh da skwer, etre kêrioù eus an div vro peneviken.

Er miz-mañ eta ec'h erruo ar gasadenn-gentañ da dud Croatia. En sell emañ ar c'homite da gas traoù all, evel laezh-poultir, er mizioù o tont, kenkent ha ma vo tu. Digor eo ar c'homite d'an holl skoazellerien c'hoazh.

Skoazell Breizh-Kroatia, Gwazh Pren
22300 Plouber 96 47 12 80

Darempredoù donoc'h evit kas ar stourm war-raok Kendalc'h keltiek Enez Vanav

Dalc'het eo bet e Doolish (Douglas), kêrbenn Enez Vanav, eus al lun 20 a viz Ebrel d'ar Sador 25. Ur c'hant bennak a gellid a oa deuet, dek o tont eus Breizh. Danvez ar c'hendalc'h a oa : "A living culture" (ur sevenadur bev). Ur brezegenn a zo bet graet gant un dileuniad eus pep bro. Ar bodadegoù a zo bet dalc'het en "Ascott Hotel" nepell eus kreiz kêr. Me a reas ar brezegenn en anv Breizh, e saozneg evel just.

Dioùzh an endervezh e veze pourmenadennoù plijus ha kentelious (Laxey Valley gant ar rod bras, mirdi broadel enez Vanav e Doolish, mirdi al labour douar e Glegneash, kastell istorel Castletown) hag abadennoù kan ha sonerezh goude-koan. Muoc'h a berzhidi a oa er wech-mañ

egret er c'hendalc'hioù all en enezenn. Aozet mat-tre e oa bet pep tra gant skourr Enez Vanav, dreist-holl gant ar sekretouraz. Bep beure e voe an oferenñ e brezhoneg evit an Iwerzhoniz, a gane kantikoù en iwerzhoneg... Ekumenegezh a yezh...

Degemeret omp bet gant maer Doolish, ha gant kadoriad ar Parlamant (an Tynwald), Sir Charles Keruzh. N'emañ ket Enez Vanav e diabarzh ar Rouantelezh Unanet (United Kingdom) ur vro dizalc'h eo - nag er c'henvarc'had europat kennebaut. Setu perak ez eo ur baradoz evit ar bankoù hag ar c'hompagnunezhioù etrevroadel.

Unan eus an traoù pouezusañ a vez graet e seurt kendalc'hioù eo an darempredoù donoc'h a vez skoulmet gant Kelted all evit kas war-raok ar

stourm sevenadurel, dreist-holl gant Skosiz ha Kerneveuriz a zo an tostañ ouzhip war an dachenn-se. Gant Manaviz ivez ez eo pouezus kenlabourat : en ur ober ugent vloaz o deus liasementet dre bevar niver ar vanavegerien : 600 a zo bremañ barrek da gomz ar yezh. Tamm-ha-tamm e vez desket e skolioù'zo. Labourat kalonek a ra ivez ar strollad politikel broadel "Mec Vannin" (mibien enez Vanav).

Da vloaz e vo dalc'het ar c'hendalc'h Keltiek en Inverness (hanternoz Bro Skos), e beg al Loch Ness, eus an 26 a viz Gouere d'an 31. War an danvez-mañ e vo : "Celtic youth participation" (perzh ar yaouankiz keltiek). Emeur e sell da gas meur a vreizhad yaouank du-hont.

Yann Talbot

Alan Stivell Paeron skol DIWAN Roazhon



D'ar Sadorn 16 a viz Mae ez euz bet ul lid da vare kreisteiz e-kerz dorioù digor Skol DIWAN Roazhon. Paeroniet eo bet ar skol gant Alan Stivell, deuet da chom e Bro Roazhon abaoe bloaz. Lakaet oa bet evit an degouezh-se ur

seizenn gwenn-ha-du dirak dor ar skol, ha troc'het oa bet gant Alan dirak tud ar vugale hag un nebeud mignonod.

Skol DIWAN Roazhon : skol vamm ha kentañ derez - div skolaerezh - digoret e vo ar CM2 ar bloaz skol a zeu - 96 kanol Sant Varzhin - Roazhon

KINNGOU-LABOUR

Diwan o tutañ danvez-skolaerien

divizoù degemer : Bak + 3 gouzout brezhoneg, stummadur gopret

Skolioù kentañ derez : 2 guzulier pedagogel, skiant-prenet skolaer + mestroniezh ar yezh brezhoneg.

Skolaj Roparz Hemon : 4 gelenner amzer diglok (brezhoneg, galleg, saozneg ha teknologiezh). Aotreegezh ha skiant-prenet war an danvez. Evit an tri post diwezhañ, eo ret gouzout brezhoneg.

Evit an diabarzhadalezh : 2 animatour amzer diglok, brezhonegerien.

Kas C.V. ha lizhar da : Diwan B.P. 22 29870 Laniliz

Bez emañ embannadurioù An Here o klask un implijad(ez) CES brezhoneger(ez) evit ul labour sekretouriezh (biskrivañ...). Kas ur c'h-surriculum vitae da An Here Kergleuz 29480 Ar Releg Kerhuon Pgz : 98.28.10.37

Un tamm istor eus ar Vreuriezh Beleien Breizh

Ganet e voe "Beleien e Breizh" e miz Gwengolo 87 war-lerc'h marv Marc'harid Gourlaouen, pa voe nac'het gant person Douarnenez lidañ evit ul oferenñ gañv e brezhoneg. Santout a ris neuze pegement a ezhomm e oa eus ur strollad beleien evit sikour ar vrezhonegerien gristen ha difenn o gwinoù en liz. Kas a ris un eizh kant bennak a sinadurioù enep an hini a oa person Douarnenez d'ar c'houlz-se. C'hoazh e chom ganin un tri c'hant bennak n'am boa ket kaset dezhañ. Hen ober a rin marteze un deziz bennak. War-lerc'h se e voe dalc'het ar vodadeg kentañ e Rostrenn. Abaoe Gwengolo 87 hon eus dalc'het ur vodadeg vizek er barrez-mañ-parrez, embannet 2 levr ("levrig ar c'hristen", ha "Fañch Kereour Gwidal"), skoulmet darempredoù gant "Kristienien Breizh" ha gant "Breuriezh Sant Ilud", kemeret perzh bep bloaz e Gouel ar Brezhoneg ha neuze aozet ur c'hamp hañv abaoe 89. E 92 e vo bet aozet daou zoken. Ur

peuzek bennak a valeien a vez ingal a-walc'h tro-dro d'ar vreuriezh, hag un nebeut laiked ivez. Un tregont bennak a valeien a zo bet tizhet e stumm pe stumm. Ar c'hannadig "Mouezh Sant Erwan" a vez kaset d'un 50 bennak a dud pa gevredigezhioù. Alies-tre e vez adkemeret pannedoù zo er c'halaouennoù evel "Bremañ". Menegomp ivez eo bet ganet ar follennig "Hentoù", erru gant ha nivrenn 12, diwar labour "Beleien e Breizh" ; un tregont bennak a diegezhioù a vez kelaouet evel-se. Menegomp erlin an oferennoù brezhonek a vez lidet ganaomp : e "Gouel ar Brezhoneg", e-pad ar c'hampoù, da geñver obidoù zo, hep kontañ ar badeziantoù er parrezioù, hag an disklariaurioù a feiz e dibenn ar c'hamp-hañv. Ur seurt gwir gumuniezh a vrezhonegerien ez omp deus da vezañ etre beleien, laiked ha tiegezhioù. Mankout a ra leanezed ganimp avat. ■ Yann Talbot.

Pik-nik bras



a viz Gouere
Roc'h Treduden

Pik Nik bras gant Stourm ar Brezhoneg evit ur ganol skinwol e Brezhoneg

Kreisteiz :


pik-nik ha gouel da houl, kas ha son, stadoù, protegoñnoù

Pevar levrig skudennaouet-kaer embannet gant Gallimard

Hollrudet eo an ti-embann Gallimard bet krouet e 1891 e Pariz ha gantañ ez eo bet embannet kalz eus ar skrivagnerien vruetañ er c'hantved-mañ. Ar pezh n'eo ket ken anavezet avat eo ar plas en deus kemeret ivez abaoe un nebeud bloavezhioù war dachenn al levrioù evit ar yaouankiz. E 1972 ez eus bet krouet en ti-embann-se ur rann a-ziforc'h evit pleidiñ gant ar seurt levrioù-se : Gallimard Jeunesse (Gallimard Yaouankiz). Krouer ha rener ar rann-se (deuet da vezañ bremañ ur c'hevredad distag diouzh Gallimard) a zo ur Breizhad, Pierre Marchand e anv, bet ganet war harzoù Breizh. Tremenet en deus e vugalegi e Bro-Naoned ha krouet en deus da labourat evel mous e chanterioù Dubigeon da sevel listri e Naoned. Da c'houde ez eo deuet da vezañ martolod a-raok mont war dachenn an embann. Gant ur mignon en deus krouet ar gelañ-gelañenn "Voiles et Voiliers" (Gouelioù ha bigi dre lien) hag aet eo da c'houde da labourat e ti Gallimard. E korf ugent vloaz en deus embannet Pierre Marchand ouzhpenn 2300 levrig d'ha kalz anezho o deus graet berzh-mat neket hepken e Stad-C'hall met ivez e kalz broioù all. Brudet-kenañ eo deuet da vezañ da skouer an dastumadenn "Gallimard Découvertes" (Gallimard Dizoloadennoù) a zo bet embannet enni ouzhpenn 100 titl d'ha kalz anezho bet embannet e yezhoù all en un tregont bro betek dre ar bed, en o zouez ar Stadoù-Unanet ha Japan... Gant Gallimard e oa bet embannet d'ha e 1981 an dastumadenn Folio junior ul

levr brezhonek pe kentoc'h ul levrig divyezhek, e titl "Ar Marh dall/Le cheval aveugle", anezhañ un dastumadenn kontadennoù, danevelloù ha barzhonegoù bet dibabet gant ar Bleun-Brug. Emañ Gallimard o paouez embann pevar levrig nevez kaer-tre e brezhoneg, o zituloù "Ar vleunienn", "An douar hag an Oabl", "Ar c'hastell-kreñv" hag "An Nijerez". Gant Olivier Ar Mogn, skoazellet gant Divi Kervella.int bet lakaet e brezhoneg, Embannet e oa bet

An nijerez



dija ar pevar ziti-se en dastumadenn "Va dizoloadennoù kentañ" e galle hag ivez en alamaneg, e saozneg, e kastilhaneg, en italianeg, en izelvroeg, e danege, e japaneg hag e yezhoù all c'hoazh. E brezhoneg ez eus bet tennet 1500 skouerenn aus pep titl ha ma teunt da vezañ peurlvezhet buan e c'helle bezañ embannet titloù all eus an dastumadenn (ouzhpenn 30 titl a zo deuet er-maez enni e galleg d'ha).

Dafar-Kelenn Brezhoneg

N'eo ket stank an dafar kelenn brezhoneg d'an deraouidi, er skolioù-noz, er skolioù dibenn-sizhun. Rekouret e c'hall bezañ eta ar re a bled gant ar c'helenn-se gant an dafar nevez savet gant Mark Kerrain, kelennor brezhoneg e Roazhon. Kingig a ra :
- Ur c'halarad divizoù berr e brezhoneg, 47 anezho, renket e-barzh 27 kentel (e-liche dre vras gant 15 kentel gentañ "Brezhoneg buan hag aes").
- Ar c'hasedig divizoù (26 munutenn, enrolladenn, 47 anezho, renket e-barzh 27 kentel) zo bet savet goude an enrolladenn.
Ar re a garfe kaout an dafar-se a c'hall goullenn digant an dozer, 100 lur ar c'halarad hag ar c'hasedig. M. Kerrain, bremañ 129 - miz Even 1992

42 straed al Lireu, 35136 Sant Jakez al Lanneg. Kresket e vo niver an divizoù-se a-benn bloaz. Fichennoù-kelenn da vont da heul a zo ivez war ar stern hag ur c'halarad poelladennoù a vo savet ivez.

Brezhoneg "quick & easy"

Un trede embannadur eus "Brezhoneg Buan hag Aes" e Saozneg a zo bet lakaet da zont er-maez gant Cork University Press. Setu amañ ur chomlec'h evit goullenn anezhañ :
Ms. Anne M. Lee
Marketing Promotions
Cork University Press
Coláiste na h-Ollscoile Corcaigh
Cork Ireland Eire

Ar stourm iwerzhonat 1916-1992 gant Roger FALIGOT

Kenskriver Libération en Iwerzhon er bloavezhioù dek ha tri-ugent en deus skrivet Roger Faligot pemp levrig ha kantadoù a bennadoù diwar ar vro diframmet-mañ. Ar stourm iwerzhonat, e levrig gentañ, deuet er-maez e 1977, a zo o paouez bezañ adembannet, kresket gant istor dek vloaz gouarnamant Margaret Thatcher (1979-1989). Stank mat an testiñoù hag an diskuladennoù ennañ, setu ul levrig hag a lak war-wel goullenn pennañ "kudenn Iwerzhon".




Roger Faligot da geñver emvod kelaouidi an 21 a viz Mae e Roazhon

ha diskoulmet e vo gant Europa ar bloavezh 2000 ?
Peseurt degouezhoù evit ma tavle an armoù en Iwerzhon ? Ha dont a raio tud yaouank, ken en Iwerzhon ken e Bro-Saoz, da lijnañ diskoulmoù politikel nevez d'ur stourm broadel kalz nebeutoc'h lujzet ha kalz nebeutoc'h feuls eget reoù republikoù URSS kent, stadoù goullennor Afrika ar Su pe broadoù enebet Azia ar gevred ?
El levrig e vez displeget penaos e oa bet savet gant I.R.A. taol Brighton a-enep an Itron Houarn, sekretou an Eksund, ar vag leun a armoù libiat bet harzet e Breizh, liammoù Iwerzhon gant strolladoù estren : ETA, FLNC, F.L.B., O.L.P. hag ANC da skwer, raktresoù evit ar peoc'h bet savet gant un tu pe egile, ha dazont Iwerzhon en Europa ■
(Embannet gant Terre de Brumes, str. Antrain-Entraven, 35700 Roazhon, 280 pajenn, 199 lur)
Aozet e vo divizoù gant Roger Faligot e Breizh : d'ar 17 a viz Even e Roazhon, gant Noël Laine ha Joseph Martray, a-zivout Europa ar minorelezhioù, hag e miz Eost da geñver Gouel ar filmoù e Douarnenez, gouestlet da Iwerzhon ar bloaz-mañ.

Hegareg

Film E.T. Heklev ur bed all



Karantez ar piac'hig evit ar boud

Dek vloaz'zo e oa savet ar film-se ha brudet-kenañ eo deuet da vezañ. Emichañs, oc'h bet sachet da sellet outañ gant ho vugale, pe bugale ho mignoned, betek ur sal-sinema pe dirak ur skramm-tele nevez'zo.
Lennet em eus un tu bennak e oa ar film-se ur skouer dispar da zeskñ d'an holl degemer ha karet tud distañvel, dre ma'z eo vil a-walc'h ar boud dreistplanedennek ijinet. Marteze ez eo gwir, met n'eo ket abalamour da se e vazer fromet gant an istor ha gant an darvoudoù displeget.
Ar pezh a ziskouez, d'am soñj, ez eo kentoc'h un heklek eus ar stad a vugaleaj, pe welloc'h, eus ar stad "vabigeaj". Hag evit meur a abeg.

E.T. eveldomp

Dre ma n'eo ket evit ober gant yezh an dud eo E.T. heñvel ouzh ar vabigeoed o klevet tro-dro dezho a bep seurt trouzoù, trouz binvij, mekanikoù evel just, trouz ar boudoù-bev ha yezh an dud ivez. Er film e vez gwelet E.T. o teskiñ kaozeal tamm-ha-tamm, kaketall bommoù, gerioù ha frazennoù, dres evel ma oa bet ret da bep hini a'chanomp ober.
Daoust ma ne gomz ket, ez eo barrek ar boud-se memestra da gaout darempredoù gant tud, hag e teu tamm-ha-tamm da vezañ eoret ouzh ur paotr bihan, kement ha ken bihan ma

sant hemañ darvoudoù a c'hoarvez a-bell gant egile.
Lakaat a ra an darempredoù-se da soñjal el liammoù bredel (psikologel) etre ar vamm hag he babig e mareadoù kentañ ar vuhez (ha diwezhatoc'h, betek dezhañ bezañ klavir diwar enkreiz eben).

E.T. Roue

Barrek eo E.T. ivez da bareañ ur biz gloazet en un doare dreistwirvoudel, da lakaat polodoù pouner da nijal ha da zañsal en aer, da reiñ buhez en-dro d'ar bleunioù gweñvet, kenkouls ha da droadikeliat gant e varc'h-houarn etouez ar c'houmoul. An traoù-se zo taolioù-burzud ha n'int ket souezhus evit ar vabigeoed. Petra a reont-hi pa vezont douget gant o zad hag o mamm hag eus an eil d'egile ? Nijal ? Daoust ha n'eus ket mekanikoù ha binvijioù o vont en-dro drezo o-unan ? Ha n'eo ket ken marzhuz-se a teule kroc'han buan adarre war ur gouli nag e tiwanfe bleunioù nevez war-lerc'h ar re gozh. Ha krediñ a ra ar vabigeoed ez int barrek, ha mestr zoken, war an darvoudoù-se.
Ya, ur roue en ur badig dreistordinal eo ar bugel nevez-ganet. Chom a ra ur c'halz eus an amzer-se e spered kuzh an dud koshoc'h. Gant ur film a-seurt gant E.T., e'ch adkaver un heklek eus ar bed-se.

J.Y.B.

15-19 a viz Gouere e Landerne

KANN AL LOAR



5 devezh gouel

Merc'her 15 a viz Gouere : abaden digeriñ
Yaou 16 a viz Gouere : Ar Vro Bagan, evit ar wach kentañ (ha nemeti) "AN ALAR HAG AR STERED"
Gwener 17 a viz Gouere : KANADENN EVIT AR PEOC'H
Sadorn 18 a viz Gouere : Stivell
Sul 19 a viz Gouere : Gouel ar Mor hag ar porzh, distro an "DALC'H MAT"
Hag e-pad ar gouelioù : ur fest-noz bemnoz, gouel ar vugale, kêriadenn an artisaned.

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdonoù Vihan
29000 Kemper
Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adalek 130 lur

"Assemblée de La Boueze" Gouel Breizh-Uhel

6/7 a viz Mezheven
Sant-Kristol/Sant-Owen (Traonienn ar Gouenon)

400 soner ha kaner

Balioù - sonadegoù - c'hoariva - c'hoarioù henvoazel - gouren - sinema - diskouezadegoù - sonerezh er straedoù.

D'ar Sadorn e Sant-Owen

Da 8 eur noz e sal ar gouelioù :

Nozvezh c'hoarzhin gant Marie Guorzailles, Fro-Fro, Elian Rabine, Gigi Bigot. Bal bras a Vro C'hhallo gant un nebeud eus gwellañ sonerien Breizh-Uhel.

D'ar Sul e Sant-Kristol

Gouel bras ar sonerien hengounel. 10 eurvezh sonerezh didroch, 7 leuren.

5 diskouezadeg diwar-benn glad Breizh-Uhel (tiez, natur, lstor).

Sinema dibaoez er c'hevell gozh. Filmoù diwar-benn Gorre-Breizh hag a vo bannet evit ar wech kentañ gant filmaoeg Breizh.

Standoù kavredadoù - artizaned ar vro - Luderien - da 6 eur c'hoariva er c'hrañj : "La Marmite" gant Jean Kergrist, c'hoarjet gant komedianed c'hoariva Herzleg-Liverieg.

Sant-Owen

8 eur noz, sal ar gouelioù

Sonadeg dreistordinal gant Philippe Bruneau, mestr akordeonour Bro-Gedeik

Mardi-Gras (sonerezh "cajun"), strollad nevez Yann Dour.

Bal bras ar Vro-C'hhallo a-hed an noz.



5-6-7 a viz Even - Gouel Broadel ar Brezhoneg

Arc'hant Breizh e-pad Gouel Broadel ar Brezhoneg

30 000 bilhed-bank, 350 000 lur gwerzh dezho, zo deuet e-maez gwaskoù moullerezh Keltia Graphic. Gant Ronan Broustal ez int bet treset.

Tri seurt bilhedoù zo bet ijinet. Ur bilhed 5 lur warnañ Anna Vreizh, unan 10 lur warnañ Yann IV hag unan ugent lur gant Roparz Hemon.

N'eo ket hepken war dachenn ar gouel e vo degemeret ar bilhedoù-mañ. Holl genwerzhourien Spezed a raio ganto ivez ■

Mell-droad

Breizh trec'h en europfoot yaouerien 92



Skipailh Breizh degemeret ganti arouez ar trec'h nozvezh ar c'hrogaed diwezhañ

Evit an **ell gwech** eo bet trec'h yaouerien Vreizh (15-16 vloaz) er gevezadeg vell-droad aozet en Aodou-An-Arvor etre 12 skipailh : Norvegia, Bro-Skos, Israel, Bro-C'hall, Spagn, Tchekoslovakia, Enezenn Vaoris, Danemark, Belgia, Stadoù-Unanet Amerika hag un dibab eus Aodou-An-Arvor. Ar wech kentañ he doa gounezet Breizh a-enep Stad-Spagn e 1988.

Trec'h he deus Breizh war Norvegia er match-dibenn dre 1 da 0 d'ar Sadorn 25 a viz Ebrel dirak tost da 5000 arvester. Ar pal nemetañ a zo bet merket dre ur penalti d'ar 80vet munutenn gant Gwenael Corbin eus stad Roazhon, unan eus gwellañ c'hoarierien ar match. Mar seblant strizh a-walc'h ar trec'h eo ret menegiñ avat e ouezas ar Vretoned diskouez speredegezh, youl, ha kalonegezh dirak ur skipailh norvegiat nerzhus a zifenna start. E meur a zegouezh all o dije gallet merkañ : un tenn all gant Corbin (15vet munutenn), un tenn war ar peul gant Bourmaud (64vet munutenn), da skouer.

Breizh trec'h war Skos

Arabat d'an unan disofijal Kennebeut eo dre 4-0 e oa bet trec'het Bro-Skos gant Breizh an hantereñ-dibenn da geñver ur match brav-kenañ. Norvegia a oa en em gavet en dibenn goude trec'hiñ war Israel dre 2-0. Er c'hard-dibenn o doa trec'h : Breizh war Tchekoslovakia (1-0), Norvegia war Enezenn Vaoris (1-0), Israel war Spagn (0-0 ha 4-3 dre benallioù), ha Bro-Skos war Vro-C'hall (1-0).

E skipailh Breizh e oa Heurtebis (stad Roazhon), Chapalain (stad Kemper), Tangi (stad Brest), Lamoureux (F-C Gwened), Dubois (stad Roazhon), Bourdeau (stad Roazhon), Jouault (stad Roazhon), Labbe (stad Roazhon), Geraud (E.A. Gwangamp), Loric (stad Roazhon) ha Bourmaud (stad Roazhon). An embregere, Jacques Riou eus Kemper a c'helle bezañ laouen eus e skipailh ■

T.L.

7VET STAJ ETREBROADEL SONEREZH BREIZHEK HA KELTIK

03/07 a viz Eost 1992

Ar 7vet staj etrebroadel sonerezh breizhek ha keltiek aozet gant ar greizenn sevenadurel Amzer Nevez eus Plañvour (58) a vo eus an 3 betek ar 7 a viz Eost 1992. Digor eo d'ar re a oar seniñ gant o benveg c'hoazh hag a fell dezho mont pelloc'h gant o anaoudegezh eus tonioù Breizh hag ar Broioù kelt.

Pañoù ar staj a zo evel-mañ :

- dizoloñ doareoù disheñvel ar c'hornioù-br.
- deskiñ ober gwelloc'h gant ar benveg.
- kaout un tañva eus ar c'henchoar.

Kemer a raio perzh er staj ar sonerien-mañ :

- Alain Pennec ha Yann-Fañch Perroches, akordeoñs,
- Josick Allot ha Youenn Le Bilhan, bombard/biniou kozh,
- Eric Marchand, kan,
- Patrick Molard ha Thierry Lahais, biniou bras,
- Jean-Michel Veillon, flaut,
- Soig Sibériil ha Gilles Le Bigot, gitar,
- Kristen Nogues ha Anne-Marie Jan, teleñn,
- Jacky Molard ha Christian Lemaitre, violoñs.

Ar gelennerien a zo sonerien diouzh o micher. Seniñ a reont er strolladoù brudet-mañ : Gwerz, Skolvan, Barzhaz, Dan, Kamia hag all.

Ar prizioù a zo evel-mañ : Kentelioù 1100 l + 50 l emezelañ, 2000 l gant ar stummañer dibaoez, bod ha boued 650 l. Goulnnet e vo 400 l arez.

Titouroù : Amzer Nevez Soye 56270 Plañvour, pg. 97 86 32 08

Sport ha Yezh Staj Brezhoneg ha Kallak

Miz Eost - Staj brezhoneg ha kallak war vor a vo etre an 22 hag an 29 a viz Eost. E ti ar re yaouank vo dalc'het ar staj-mañ - e Pampoull-pelligomz d'an niverenn 95.20.83.60. Priz ar staj : Kentelioù, bod ha a... 2200 lur.

Alouberien nevez
kozh-Noe



Enklask war ur veaj itied er vro



Biskoazh kemend-all, emañ ar skiantour gall Jean Pierre Petit o paouez embann ez eo diazezet e labour klasker er CNRS war titourioù degaset gant tud eus un douar all, ar blanedenn Ummo. Ha gweladennet eo bet hor bro gant ar veajourien divoutin-se ?

Un dra a zo sur, o lenn peseurt mod emañ an traoù o treiñ war o flanedenn, ne vo ket pareet gant an itied-se, kleñved spered ar jakobinourien, ur c'hleñved chomet diremed betek-hen, siwazh evidomp. Emaint o vevañ en ur bed ma rank an holl ennañ sujañ d'ur melestradur hollveliek. Choazet e vije bet ganto diazezañ o c'heoded war sujidgezh dall ar bobl d'ur galloud kreñv abominabl a-benn lakaat termen d'ur steudad mareoù leun a reuz. O vevañ n'eus nemet ur c'hevandir war o flanedenn, ur c'hevandir a vefe, war a seblant, par e endro da hini Bro Iwerzhon, ez eo bet unvanet abred ar pezh a ya d'ober personelezh an Ummoiz. Lakaet e vez eno da istrogelled, ar re a gred ren ur

vuhez disheñvel diouzh hini ar braz eus ar boblañs.

Ha seurt tud a zo o pourmen dibreder o c'halite en hon touez. Kredet o deus treuziñ harzoù sakr Bro C'hall hep tremen-hent. Met perak an diaoul emañ tud an FN o tevel war an embroadur kuzh-se ? N'eo ket abalamour ez eo gwenn kroc'hen an Ummoiz ha melen o gwiskadoù blev memestra ? Broudet gant ar c'hoant gouzout, em eus kaset un enklask pizh da benn war an dra-se evit Bremañ. Kredapl bras, em eus divinet dre forzh imbours'hiñ, ar perag eus ar simud kevrinus-se. O vevañ e fazi din prouennoù solut, ne c'hellin ket embann en un doare splann danvez ma dizoloadenn souezhus.

Hervez an Ummoiz, e c'hellfent embarat gant an douaridi met ganet e vefe euzhtud eus seurt darempredoù. Emaon o paouez dastum o dije graet marteze un taol esae etre an daou vrezel bed, un tu bennak e Breizh Izel.

Un test am eus kavet zoken evit kadarnaat ma martezeadenn : Divi Visant, bet paotr-al-lizhiri e parrez An Drinded pa oa yaouank. Un Nozvezh eus ar bloavezh 1928, edo o tistreiñ war droad eus ar foar. Kollet e oa bet diwar e hent dre glask ur wenojenn-dreuz na vefe biken kavet gantañ. Sklerijennet e voe a-daol-trumm ur park edo o treuziñ. Ur billig-nij eo a oa o paouez leuriañ en e greiz ha diskenn a reas diwarni ur vaouez

o tougen ur c'hrouadur etre he divrec'h. "Ha sur oc'h ne oa ket un huñvre ?" em boa goulennet digant Divi Visant. "N'on ket den da droadañ koñchennoù a seurt-se, ma c'habiten" en doa respontet din en ur vesteodiñ war-lerc'h kas war draoù e zekvet banne odivi ■

Paol ar Meur

KAZETENNOU BREIZH

L'Avenir de la Bretagne

(POBL) 150L/bloaz
BP 4103 - 22041 Sant Brieg Cedex 2

Combat Breton

(Emgann) 150L/bloaz
BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex

Le Peuple Breton

(UDB) 160L/bloaz
BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

Armor magazine

225L/bloaz
Pont Sant Jakez
BP 419 22404 Lambal Cedex